




EUNN HEUR  
DIRAG  
**AR ZACRAMANT**  
MEULET RA VEZO  
Great gant ann Aotrou LE BAIL,  
PERSON KERSAINT-PLABENNEC.  
  
E LANDERNE,  
Moulet gant P. B. DESMOULINS,  
Rù ar Pont.



EUNN HEUR  
DIRAG  
**AR ZACRAMANT**  
MEULET RA VEZO  
Great gant ann Aotrou LE BAIL,  
PERSON KERSAINT-PLABENNEC.  
  
E LANDERNE,  
Moulet gant P. B. DESMOULINS,  
Rù ar Pont.



## EUNN HEUR ADORASION

O va Zalver Jesus, setu me daoulinet dirazoc'h. Roet em euz va ger e rinn, bep miz, eunn heur Adorasion dirag ho Sacramant Meulet ra vezo. Ober a rinn, guella ma c'hellinn, ar pez em euz promettet. Eunn dever eo evidon, ha va interest eo ivez. Pa zonzann em buez tremenet, nag a amzer gollet da Zul, d'ann dervez benniguet-ze, hag em bije gellet da implija enn eunn doare talvoudusoc'h evit va ene! Nag a bennadoudou-mad a amzer eat ebious, o c'hoari pe o comz divar benn traou vean! Ped guech da Zul, etre ann Offern bred hag ar Gousperou, hag avechou zoken goude ar Gousperou, ounn eat d'ann hostaliri, var digarez diverraat ann amzer! Eno, em euz kavet ann tu da zispign va arc'hant, ha da jom divezatoc'h er

— 4 —

bourg. Va zud er gear a ioa nec'het, o klask gouzout e peleac'h oann chomet. Hen anzao a renkann, o va Jesus, ar Zul a zo, evit meur a hini, siouas! Kristenien var ho meno, eunn dervez a zizurz, hag eunn dervez a boan speret evit ho zud. Mad eo kemeret neuze eunn tam plijadur bennag, da ziscuiza ar c'horf hag ar speret Her gourc'hemennet oc'h euz deomp. Ehana goude al labour a zizkuiz ar c'horf; ho pedi ha sonjal enn ho comzou, pa ne ve nemet eunn heur bep sul, a raffe ar brassa vad d'hon ene : krenvaat a raffe. Eur vagadurez dispar eo evinthau. Rac, hen lavaret oc'heuz d'ann drouc-speret, deuet d'ho tenti, o va Zalver, enn desert : « Ann denn ne vev ket hebken gant bara; comzou Doue a zo ivez eur vagadurez, hag a zo red dezhan da gaout. »

Ha pedavare e roinn-me d'am ene ar vagadurez-ze, ma n'eo ket da zul? var ar zizun, em euz labouriou, afferiou ann tiegez da gass enn dro. Morse ne vezann discrog mad diouz al labour. Kaout a rann atao eunn dra bennag da ober.

— 5 —

Ne jom ganèn, evit guir, nemet ar zul, da ziscuiza ha da zoursial euz va ene. N'eo ket, a dra zur, enn hostaliri e renevezinn ar zantimanchou mad a zo em c'halon; n'eo ket eno e kavinn ann tu da essaat va speret, skuiz gant al labour, ha gant va afferiou. Ne rinn nemet samma muioc'h mui va c'hous-tians; ha diessoc'h e vezo va fenn pa zistroinn d'am labour. Va interest eo eta kaout amzer da dremen eunn heur, bep miz, ganeoc'h, o va Jesus. Daoulinet ehars treid ann Aoter, e savinn va speret ha va c'halon varzu ennhoc'h evit hoc'h adori, ho trugarecaat, ho pedi, hag ho tigoll ivez euz ar ienien, o deuz, siouaz! re a gristenien laosk evidoc'h, c'hui au Doue cuzet, *Deus absconditus*, ker madelezus, ker carantezus evidomp. Dilezet o peuz palez ann Env, ha diskennet oc'h var ann Aoter, dindan doareou ar bara, evit chom gant ho pugale, a zo c'hoas enn draonienma a zaelou. Eurus e venn, ma c'helfenn laouennat ho Calon sacre, epad va heur Adorasion. Rac-se, araoc commans, e

lavarinn eunn dizenez eus ar Chapeled,  
evit goulenn ar c'hras-ze dre intersession  
ho Mam, ar Verchez Glorius Vari.



## ACT A ADORASION

Me hoc'h ador, o va Jesus, hag hoc'h  
anavez evit va mestr kenta, ha va Doue.  
Joa em euz pa c'hellann renta deoc'h  
ann enor, ar respet hag ar zentidigez  
dleet d'am C'hrouer, ha d'am Zalver. Ar  
virionez a ra atao plijadur d'ann den;  
hag a greiz va c'halon, e plegann deoc'h  
e peb tra. Rac, evit adori ervad, n'eo  
ket avoalc'h daoulina, diskuez, dre ann  
dianveaz, ec'h anavezann ac'hanoc'h evit  
va Mestr. Ann doareou hag ar c'homzou  
n'int ket bepred merkou guirion. Ne  
roont ket da anaout sclear santimanhou  
cuzet ann den. C'hui a zo red hoc'h adori  
a speret hag e guirionez. *In Spiritu et  
veritate oportet adorare.* Hec discleriet  
oc'h euz guechall d'ar Samaritanen,  
deuet da guere'hat dour, da buns Jacob  
« Doue, ann Tad, eme c'hui, ne glask  
nemet tud, hag a adorfe anezhan er  
fæson-ze, a speret hag a galon. *Nam et  
Pater tales quærit, qui adorent eum.* »

Mistri ar bed-ma, ar re c'halloudussa  
zoken, ne c'hellont ket goulenn kement-  
all. Ar pez a zo a zianveaz, setu aze  
ar pez a c'hellont da velet ha da anaout.  
Santimanhou ar galon a jom, hag a  
jomo bepred cuzet outho. Eaz eo trompla  
anezho gant comzou flour ha doareou  
kaer. Mes c'hui, o va Doue, a lenn e gue-  
led hor c'halon, hag a anavez ar zonje-  
sonou muia cuzet. *Scrutans corda et renes,  
Deus.* Klask ho troumpla a ve en em fazia  
va unan. Guelet hag anaout a rit pep tra.  
Neuz netra cuzet ouzoc'h! Sonj am euz  
euz ar rebech, great ganeoc'h d'ar Pha-  
rizianet ha d'ann Doctoret euz al lezen.  
Ar re-ma ne glaskent nemet plijout  
d'ann dud, troet m'az oant gant ann  
enoriou, ann arc'hant hag ar plijadu-  
reziou. Ho lezen a c'houre'hemenne,  
guir eo, hoc'h adori. Daoulina a reant  
enn templ, hervez ma'z'oa ordrenet; la-  
varet a reant pedennou kaer; mes, ar  
pedennou-ze ne deuent ket euz ar galon.  
Ne reant, an dud keiz-ze koulz lavaret,  
nemet ann neuz da bedi. Ho c'homzou a  
voa comzou goullô, comzou ha n'oa tam

buez enno. N'oant ket mouez ar speret  
hag ar galon, mes hebken trouz ho mu-  
zellou. Her gouzout a reac'h ervad, hag  
evel inouet ha skuiz gant jestou ann  
dud-ze, o peuz ho diskuillet eb damant :  
« Ar bobl-ma, eme c'hui, a enor ac'hanon  
a c'hinou, mes he galon a zo pell  
diouzinn. *Populus hic labiis me honorat,  
cor autem eorum longe est a me.* » Ne  
silaouit ket ar seurt pedennou-ze :  
kassaus int evidoc'h. Ar guir beden, ar  
guir adoration, a deu euz a galon ann  
den.

Ma taoulinann eta dirazoc'h, o va  
Jesus, eo a greiz calon ha gant ar brassa  
doujans. Dirag eur myster ker braz,  
dirag eur burzud, great gant ho caran-  
tez a Zalver, e stouann va fenn hag e  
lakann va speret da blega. Sacramant ann  
Aoter a zo, a dra zur, unan euz ar mys-  
teriou brassa euz ar Feiz. *Mysterium fidei.*  
Cuzet oc'h d'am daoulagad, ha d'am ski-  
anchou-all. Ne velann, ne douchann, ne  
danvann, er Gommunion, nemet doareou  
pe spesou ar bara, evel ma eo al liou hag  
ar vlaz. Ha penaos en em lakaat, ha chom

diudan doareou ken dister ! Sebezet ounn, o sonjal e kement-all. Credi a rann evelato ; rac, hel lavaret oc'h euz. Ho comzou a zo ker freaz, ker selear, ma ne c'hell den nac'h ar virionez-ze. Ia, bez'emaoc'h, o va Jesus, er Zacramant Meulet ra vezo, corf, goad, ene ha divinite, evel Doue ha Den. Nag a boan n'o deus ket kemeret ann heretiket, evit lakaat ann dud da ziscredi ar virionez-ze ! Nag a droidellerez n'o deus ket klasket ar brotestantet, evit diskar ar greden-ze euz hor feiz ! Kaer o deuz bet poania, eo bet red dezho anzaou, eo kelennadurez ann Iliz hervez ho comzou. « Ma teuffe Carlostad, eme Luther, (en eur gaozeal divarbenn unan euz ann heretiket, ar re voassa, a du ganthan), ma teuffe Carlostad, da ziskuez dinn, eo guir n'euz nemet bara e Sacramant an Aoter, e rafte dinn ar brassa plijadur ; ha trugarekaat a raffenn anezhan, a greiz va c'halon. Tro e roffe dinn neuze d'en em venji euz ar Pap. Mes, kaer em euz trei ha distrei, e renkann anzaou emma hor Zalver e Sacramant ann Aoter.

Comzou ann Aviel a so ken selear, ken anat, ma ne c'heller ket beza var-var euz ar virionez-ze : ha dreist oll nac'h anezhi a ve beza diskiant. » Ann dud keiz-ze, tec'het divar ann hent mad, a zo bet red dezho, o va Jesus, trei ho comzou var ann tu-eneb, evit kass ho mennoziou fallacr da benn.

Breman ez euz trivarc'h cant vloas bennac, derc'hent ho maro, e d'oc'h o tibri ar goân diveza gant hoc'h Ebestel. Kemeret a rejoc'h etre ho taouarn euz ar bara, a ioa var ann daol ; hag o veza savet ho taoulagad etrezec ann Env, evit ober eur beden d'ho Tad, oc'h euz benniguet ar bara-ze ; ha goude beza great tammou anezhan, oc'h euz hen roet da zibri d'hoc'h Ebestel, en eur lavaret dezho : « Kemerit ha debrit euz ann dra-ma oll, rac ann dra-ma eo va c'horf, a vezo lakeat d'ar maro evidoc'h. *hoc est corpus meum, quod pro vobis tradetur.* » Hervez ar c'homzou-ze, tennet euz ann Aviel, e velann ervad, o va Jesus, ne c'halvit mui bara ar pez a roit da zebri d'hoc'h Ebestel. Rac, en eur ginnig

dezho ar pez oc'h euz etre ho taouarn, e lavarit *hoc — an dra-ma —* eo va c'horf, a vezo lakeat d'ar maro evidoc'h. Ma chom eta c'hoas, var ar pez oc'h euz etre ho taouarn sacr, doareou ar bara, ann danvez pe ar substans euz ar bara a zo eat kuit, ha chenchet ennjeur substans all, subtans ho corf, ho coad. Nerz ho comz oll-c'halloudec eo en deuz great ar burzud-ze, ar chenchamant-ze. Ho comz a Zoue a ra, var ann taol, ar pez a lavar. Goude comzou ar gonsacration, ne jom mui, var ann Aoter, netra euz ar bara, nemet ar spesou pe ann doareou.

N'eo ket evit eur vech hepken oc'h euz great ar burzud-ze, ar brassa euz hoc'h oll burzudou, o va Jesus. Padout a reio, epad ma chomo ar bed-ma enn he za, peguir e roit d'hoc'h Ebestel, ha dreze d'ann oll veleien, a deuio var ho lerc'h, ar c'halloud da ober kement-all, da jench ar substans euz ar bara e substans ho corf, ho coad, hoc'h ene hag ho tivinite. Selear meurbed eo ho comzou : « Grit, eme c'hui, grit an dra-

ma da zalc'her sonj ac'hanon-me. *Hoc facite in meam commemorationem.* » Setu perag, adalec ar moment benniget, ma oc'h euz instituet Sacramant ann Aoter, e kement leac'h ma z'euz eur belec da lavaret ann Offer, e tiskennit bemdez var ann Aoter, hag e chomit aze, enn Tabernacl, noz deiz ganeomp, cuzet dindan ar spesou sacr.

Ne glaskinn ket gouzout penaos en em zalc'hit enn eur stad ken dister. Eur myster eo evidon, o va Jesus. Mes, pa zonzjann mad, n'ounn ket souezet evelato : ne vijac'h ket ann oll-c'halloudec, ma n'o pije great nemet traou eaz da speret ann den da gomprenn. Kaer o deuz, tud-zo, kaout eur speret lemm ha gouizice, e chomo atao eunn dra bennac gantho da zeski. Berr vel eo hor speret var ann douar-ma.

Ia, credi a rann, hag anaout a rann ervad emaoe'h, er Zacramant Meulet ra vezo, guir Doue ha guir Den. Dister ho stad, a dra zur. Cuzet dindan doareou eunn tam bara, en em lakeat oc'h, koulz lavaret, da netra, *exinanivit semetipsum* ; hag abalamour dinn, eo, o va Zal-

ver, e rit kement-all, me ho crouadur ken dibarfet ha ken ingrat. Ne vouezann ket penaos anaout eur vadelez ker bras. Morse ne c'hellinn hoc'h adori hervez ma'z'eo dleet. E scoas deoc'h n'ounn nemet poultr ha ludu. Oh! red eo dinn en em erbedi ouz ar Verc'hez Glorius Vari, ha pedi anezhi da ginnig deoc'h, o va Jesus, va speret, va c'halon, va skianchou, kement a zo ac'hanon. Eunn intansion-ma, ez ann breman da lavaret eunn dizenez euz ar chapeled.



ACT A DRUGAREZ.

O va Jesus, izel ha dister eo, evit guir, ho stad e Sacramant ann Aoter! Diez evije zoken sonjal ha kaout eur stad all izelloc'h ha disteroc'h. En em lakaat ha chom euzet, dindan doareou eunn tam bara, corf, goad, ene ha divinite! Piou en devije credet kement-all! Evidon-me hen anzaou, ma vije deuet eunn den, ar gouiczioka, d'hel lavaret dinn, n'em bije birviken credet anezhan. Mes n'eo ket eunn den, c'hui oc'h nuan, c'hui, o va Jesus, ar virionez memes, oc'h euz hen discleriet freaz ha splann d'ann oll : « Ann dra-ma eo va c'horf, a vezo lakeat d'ar maro evidoc'h. » Ne c'hellit na fazia hoc'h unan, nag hon lakaat da fazia.

Ann Abostol sant Yan, ho diskibl muia caret, a jom evel sebezet, mantret dirag ar Zacramant Meulet ra vezo. Seblanti a ra kaout, er Sacramant-ze, ann termen diveza d'ho calloud ha d'ho madelez. C'hui goulscoude ann oll c'haloudec, hag ann oll vadelez! Araoc conta

deomp, penaos oac'h en em gemeret evit institui Sacramant ann Aoter, ann abostol a lavar enn Aviel : « Jesus, o c'houzout oa deuet evinthan ann heur da dremen euz ar bed-ma da vont daved he dad, goude beza caret he Ziskibien, pe ann dud choazet a ioa var ann douar, a garas anezho, keit ha ma c'helle mont he garantez : *In finem dilexit eos.* » Hervez sant Yan eta, ne c'hellac'h ket mont larkoc'h. Ann Tadou santel euz ann Iliz a ro deomp da glevet ar memes tra : « Pegen pinvidic bennac hoc'h, o va Jesus, eme sant Augustin, n'oc'h euz netra, hag en deffe muioc'h a dalvoudegez eget ar Zacramant Meulet ra vezo; pegen galloudus bennac hoc'h, n'oc'h evit ober netra dreist ar Zacramant-ma; ha pegen gouiziec bennac hoc'h, ne anavezit netra hag a ve enn tu all dezhan! » Guir eo.

Ar pezh oc'h euz great, o va Doue, evit hor savetei, n'eo netra e scoas ar pezh a rit, evit kendelc'her ennomp ar vuez kristen. Ar garantez a ziskuezit dinn, o tont er bed, enn eur c'hraou,

var eunn dournad kolo, o veva er haourentez e stal ho tad mager, sant Joseph, o labourat hag o c'hounit ho para diouz c'huezen ho tal, o vont hag o tont dre ar Judee, epad tri bloas, dindan ann amzer hag a dreuz peb seurt hentchou, o prezeg ann Aviel, ha d'ar fin o vervel var ar groas, e kreiz ann dismegansou ar re vrassa hag ann tourmanchou ar re scrijussa, ann traou-ze oll n'int ket da veza lakeat e kemm gant ar garantez a ziskuezit dinn e Sacramant ann Aoter. Ia, ho carantez hag ho carantez hebken eo en deuz lakeat ac'hanoc'h enn eur stad ken izel ha ken dister. Sant Yan hen lavar deomp selear avoalc'h : « *Dilexit* » Jesus en deuz caret ac'hanomp kement ha ma c'helle hen ober.

Ho carantez, o va Zalver, a zo eur garantez Doue, hag a c'hell kass da benn ar pezh a zoug, hag ar pezh a c'hoanta. Ann oll c'halloud a zo etre ho taouarn. Ar burzudou, ar re souezussa, ne c'houlennont ket kalz a boan evit beza great ganeoc'h. Gant eur gomz oc'h euz crouet ar bed hag ann traou kaer a zo er bed :

*Dixit et facta sunt ; mandavit et creata sunt.*  
 Lavaret a rit da Lazar, maro pevar der-  
 vez a ioa ; « Lazar, deuit er meaz » hag  
 ann hini maro a zavas euz ar bez leun a  
 vuez. Gant eur gomz ivez, e kavet ann tu  
 da beur-gountanti ho Calon Sacr ; c'hoant  
 o poa chom hag en em unani ganeomp  
 dre ar Gommunion, hag en em rei a rit  
 deomp, betec senti ouz ann den ; bep  
 guech ma lavar ar Belec comzou ar  
 Consecration ekreiz ann Offern diskenn  
 a rit var ann Aoter. O burzud a humilite  
 hag a carantez ! Eunn Doue a deu da  
 zenti ouz eunn den !

Koustet oamp deoc'h ker ker, o va  
 Jesus ! Rac, n'eo ket gant aour na gant  
 arc'hant oc'h eus prenet ac'hanomp.  
 Ann aour hag ann arc'hant, neuz forz  
 petra zo anzho, a zo traou veau ; n'int  
 nemet pri ha mein : euz ann douar int  
 tennet, enn eur vengleuz int bet kavet.  
 Prenet oc'h euz ac'hanomp gant eunn  
 dra preciussoc'h, gant ho Coad Sacr,  
 oc'h euz skuillet betec ar herrad diveza,  
 er Jardin Olivet ha var ar groas. Deski  
 a rit deomp petra dal hon ene ! Eunn

dra a briz bras a zo miret atao ha  
 divouallet gant evesded. Aoun zo d'he  
 goll. Goude beza prenet ac'hanomp ker  
 ker, o poa aoun, o va Zalver, e vijemp  
 eat ivez da goll.

Petra omp-ni evit stourm ouz Sa-  
 tan, enebour touet hon eneoù ? Flas-  
 tret eo bet, evit guir, he benn d'ar  
 zarpant milliget gant ho Croas, dre ho  
 maro var ar C'halvar : mes kalet ar vuez  
 ennhan, hag he lost hirr ha strobis n'hen  
 devije ket daleet da lakaat ac'hanomp  
 da goueza adarre dindan he c'halloud,  
 evit hor chassa ganthan d'ann Ifern.  
 Ar c'hig, ar c'horf, m'ema ennhan  
 hon ene paour o chom, hag ar bed,  
 ker gaouiad ha ken touellus, a zo ho  
 daou a du gant ann drouc-speret. Setu  
 perag, o va Jesus, peguir oa red deoc'h  
 distrei daved ho Tad d'ar Barados, ho  
 Calon sacr a Zalver ne lezo ket he  
 vugale muia caret ho unan, emzivad  
 var ann douar-ma. Ho plijadur eo beza  
 gant bugale ann dud. *Deliciae meae esse  
 cum filiis hominum.* Hen anzañ a rit, o  
 va Jesus, ha discleria a rit d'hoc'h Ebes-

tel : « N'ho lezinn ket minoret, emzi-  
 vaded. *Non relinquam vos orphanos.* » O  
 trugarez euz va Doue ! N'euz evit guir  
 den reuzeudikoc'h eget ar vugaligou, a  
 jom varlerc'h ho zud. Ann emzivad  
 n'o deuz den d'ho hentcha, d'ho difenn  
 hag d'ho divouall. Piou a c'hounezo dezho  
 eunn tam bara ? Ar vugaligou geiz a  
 gouez enn dienez ar vrassa ; glaouri a  
 reont gant ann naoun : pe aliez, ma o  
 deuz eunn tam bara da zibri, int guall  
 gasset gant tud estren ha digalon. Ho  
 stad var ann douar a zo, a dra zur,  
 truezus.

Nann, o va Zalver Jesus, ne lezoc'h  
 ket emzivad ar re a c'halvit, va buga-  
 ligou, « *filioli mei* » : hano hag a ro da a-  
 naout teneridigez ha nerz ho carantez  
 evidomp. Petra bennac ma eo bras malis  
 Satan, ha ma laka kement a ijinn da  
 goll ac'hanomp, ni ken dister ha ken  
 brese, prest oc'h bepred d'hon hentcha  
 e kreiz tenvalijen ar bed-ma, d'hon  
 difenn ha d'hon scoazella e kreiz ar  
 brezel, a ra deomp ar speret fallacr-  
 ze. Pa vezoc'h a du ganeomp, piou a

c'hello beza treac'h deomp ? Oh, nag a  
 vad a ra d'hor c'halon clevet ac'hanoc'h,  
 o va Zalver, o lavaret d'hoc'h Ebestel,  
 ha dre-ze deomp-ni oll : « Ha setu  
 me va unan a vezo ganeoc'h bemdez,  
 keit ha ma chomo ar bed-ma enn he za.  
 « *Et ecce ego vobiscum sum omnibus diebus  
 usque ad consummationem sæculi.* »

Ia, o va Jesus, chomet oc'h ganeomp  
 var ann douar-ma e diou zoare. Eur  
 speret on euz hag eur galon. Ezom on  
 euz dre-ze sclerijen evit guelet ha kaout  
 hon hent, ha nerz ivez evit bale dreizhan.  
 Ar sclerijen a deu deomp diganeoc'h,  
 dre hon Tad santel ar Pap, a zalc'h ho  
 plas enn hon touez ; hag ar sclerijen-  
 ze a c'hellomp da heulia, eb aoun ebet  
 da fazia. Feiz sant Perr, feiz ar Pap  
 ne vanko biken. Pedet oc'h eus evitho.  
 « *Rogavi pro te, ut non deficiat fides tua.* »

Mes, o va Jesus, n'eo ket avoalc'h  
 kaout sclerijen. Petra zervich d'ann den  
 guelet he hent digorr dirazhan, ma n'en  
 deuz ket a nerz da gerzet dreizhan.  
 Skuizus eo bale, hag avechou ann hent  
 a zo tenn ha diez. Ar beachour a zeu

da renevezi he nerz en eur dibri`bep ar mare; hag ar bara eo bouet ann den, ar bouet ar iac'hussa hag ann essa da gaout. Dindan doareou ar bara en em guzit e Sacramant ann Aoter; hag ar bara-ze, diskennet euz ann Env, a vag hon ene deomp.

Nann, nann, n'ounn ket emzivad epad ma rinn treuz ar vuez-ma. Va Zad, va Zalver ha va Doue, a zo bepred em c'hichen, ha va fljadur a vezo dont bep miz da dremen eunn heur ganthan, evit goulenn diganthen cuzul ha confort dre va sedennou. Ia, o va Jesus, ar vadelez oc'h cuz, da jom noz deiz aze, enn Tabernacl, prest atao d'am zilaou ha zoken da vaga va ene dinn, ma ounn klanv hag er boan. En em unani a rit ganen, enn doare ar strissa, dre ar Gommunion. N'ounn ket eta emzivad.

Mes, penaoz ho trugarekaat avoalc'h, evit kement a vadelez, ha kement a drugarez! Va ene a ro gloar ha meuleudi deoc'h; ha va c'halon a zrid gant ar joa, o sonjal er pezh oc'h euz great em c'henver. Ra vezinn bepred, hed va

buez, ho crouadur sentuz ha anaoudec. Ar c'hras-ze e c'houlennann diganeoc'h a greiz va c'halon, o va Jesus, cuzet dindann doareou ar bara e Sacramant ann Aoter. He goulenn a rann dre inter-session ar Verc'hez Glorius Vari, hag evit-se ez ann da lavaret eunn dizenez euz ar chapeled.



### AR BEDEN

O va Jesus, ar paour, pa c'hoar peguer bras eo madelez ar mestr, a ia kentoc'h d'he gaout. Ne goust ket kalz dezhan astenn ann dorn evit goulenn ann aluzenn; hag hardissoc'h e teu da veza, ma en deuz klevet ar mestr madelezus-ze, o lavaret dezhan : « goulennit hag e resefot, klaskit hag e kefot, skoit hag e vezo digorret d'eoc'h. » « Deuit oll davedon, eme ar mestr, c'hui a zo er boan hag a zindan ar beac'h, ha me a roio deoc'h eunn nerz nevez. *Venite ad me omnes, qui laboratis et onerati estis, et ego reficiam vos.* » Ar paour czomec a ia daved ar mestr madelezus-ze, ha leun a fizians da gaout eunn aluzenn, ober a reio hed a hed ar pezh a zo bet lavaret dezhan. Mont a reio da genta betec toull dor ann ti; hag eno, e chomo eunn nebeut amzer da ober he beden. Ma ne deuer ket d'he gaout, e savo he vouez evit rei da glevet. Ma ne deu den c'hoas, mont a reio da velet ma

kavo tud. Serret ann or, eme ar paour, marteze ar mestr n'ema ket enn ti; mes, ne ma ket pell pell diouz ar gear. Red eo klask anezhan, ervez ma en deuz lavaret dinn : « *Querite et invenietis.* » Setu ann den keiz da ober ann dro d'ann ti. Sellet a ra a bep tu, el liorz hag er parkeier tosta. Ne gav ha ne vel den ebet. Ne goll ket a gouraj evit-se; distrei a ra adarre e tal dorr ti ar mestr madelezus. Ar vech ma, n'en em gountanto ket da bedi ha da c'houlenn, a vouez huel, ann aluzenn; skei a ra var ann or : ha d'ar fin eo digoret dezhan. *Pulsate et aperietur vobis.* Ar paour n'eo ket fall-galounet. Gouzout a rea ervad e vije bet silaouet, hag en devije kavet ar pezh en doa ezom.

Mad, o va Jesus, setu me ive daoulinet e tal dorr ho Tabernacl, a zo evel pa lavarfen dorr ho ti. Aze e chomit noz deiz. Ia, c'hui eo ar mestr madelezus-ze, ha me eo ar paour. Paour ounn ha paour ounn e peb giz, evit madou ar c'horf koulz hag evit madou ann ene. Ne vevann nemet divar goust ann aluzennou,

e roit dinn bemdez. Ne m'euz netra dreizon va unan ! Petra deuffenn da veza, ma ne vije ket ho Providans oll-c'halloudec, o lakaat traou ar bed-ma da vont enn dro ! Mervel a raffenn var ann taol ; hag ann traou kaer a zo en oabl, var ann douar hag er mor, a gouesfe ractal e poultr hag e ludu ! Beuzet ounn enn ho calloud hag enn ho madelez, evel ar pesk er mor. Eur vech ma z'eo tennet ar pesk ouz ann dour, ne vev ket pell mui, ne c'hell ket kaout he vuez. Ia, pa zonzann mad, petra' m'euz me ha n'em beffe ket resevet digant ho madelez ?

Va ene a zo paour noaz. Hen diskleriet oc'h euz dinn : « eb sicour va grass, eme c'hui, o va Jesus, ne c'hellit netra. *Sine me nihil potestis facere.* » Dismantret eo het va ene dre ar pec'het originel. Henvel ounn euz eunn den, hag en deuz het eunn derchenn dom. Nerzus bras oa araoc koeza klanv ; goudeze e chom dinerzet. Kaer en deuz ober, he nerz ne deu ket dezhan ; ha red eo implija louzou bep ar mare. Kaer em euz, eme ann Abostol sant Paol, santout a rann em

izili c'hoantegeziou. N'e reont nemet enebi ouz lezen va c'houstians. Ann ioulou fall a glask bepred trec'hi va santiman chou mad. Ia, hen anzao a reukann, brese ounn evel eur gorzenn ; eunn netraic a rafe dinn terri. Mes mar d'ounn eb nerz, dispount ounn evelato ; gant ho crass, o va Zalver, ne m'euz aoun rac netra. Ar gorzennic, p'en em stag ouz ann dero, 'zo diouallet enn tourmant ar brassa. C'hui eo evidon ar vezen dero-ze, dreist oll e Sacramant ann Aoter.

Paour ounn ; red eo dinn eta goulenn. Astenn a rann va dorn deoc'h, o va Jesus, hag ho pedi a rann, a greiz calon, da gaout truez ouzinn. Ar brassa fizians em euz da veza silaouet. C'hui eo ar Mestr madelezus, oc'h euz lavaret dinn : goulennit hag e resevfot. *Petite et accipietis.* Ama, daoulinet dirag ho Tabernacl, n'eo ket red dinn mont d'ho klask : gouzout a rann ervad emac'h aze enn ho ti : ha ma chomit enn eur stad ken dister, cuzet dindan doareou eunn tam bara, c'hui ann oll-c'halloudec,

Mestr ann Env hag ann douar, n'eo nemet abalamour dinn, evit va zilaou, ha va zicour, e kreiz va faourentez, e kreiz va oll ezomou.

Ne c'houlennann ket diganeoc'h, va Zalver Jesus, kaout va flijadur var ann douar, dastum madou, na beza meulet hag enoret gant ann dud. Ne c'houlennann nemet eur c'hrass, ann hini da gendelec'her krenv ha nerzus ennon me ar feiz hag ar garantez em euz evidoc'h, evit ma c'hellinn lavaret atao e guirionez : « Ia, o va Doue, ho polontez santel bezet great, ha ne ket va hini-me. » Ar vuez, ar iec'het, ann oll madou a zo etre ho taouaru ; c'hui eo va Mestr kenta hag eur Mestr madelezus, peguir oc'h euz desket deomp lavaret : « Hon Tad, pehini a zo enn Env. »

Diouallit ac'hanon euz ar guall heur da goll ar zonz hag ar guell ac'hanoc'h e peb tra. An den just, ar c'hristen a zoare, a vev euz ar feiz. *Justus ex fide vivit.* Caret a raffenn kaout bepred beo em c'halon ar zantiman chou en doa, ervez ar Scritur Sacr, ann den santel

Job. Goulscoude, nag a gollou, nag a enkreziou, nag a boaniou a gouezas varnezhan ! Laeret dezhan he jatall, kollet ganthan he oll vadou ; he vugale zoken a zo lazet, flastret dindan mein ann ti, kouezet enn he boull. Pa glevas ar c'heleier estlamus-ze, Job a zavas enn he zav, hag a rogas he zillad : ken rannet oa he galon gant ar c'hlac'har ! Mes he feiz ennhoc'h, o va Doue, a c'hounezas var ar rann-galon. En em strinka a reas d'ann douar evit hoc'h adori ; hag e lavaras, ann dour enn he zaoulagad : « Neuz forz. Poanius eo, a dra zur, ar pez a zo en em gavet ganen. Doue eo enn doa roet din va madou ha va bugale ; Doue eo en deuz ho lammet diganen, ra vezo he hano bepred meulet. » Nebeut goude, ann den santel-ma a gouezas klanv he-unan. Eur c'hleved euzus a stagas ouz ar paour keaz Job. Adalec kern he benn betec plantou he dreid, he gorf oll a ioa goloet a c'houlou. Eunn donjer oa sellet ounthan. Job, azezet var eunn bern teil, a zec'he gant eunn tamm pod-pri



torret al lin-brein a deue euz he c'houliou. Mes n'eo ket ar c'hleuved euzuze a roe da Job ar brassa poan speret. Dilezet e oue gant ann oll! He c'hreg a rea goap anezhan, abalamour ma kendalc'he atao da lakaat he fizians ennhoc'h, o va Jesus! Tud ar bed a zo dare da daoler dismegans var ar gristenien a zoujans Doue, ha da c'hoapaat anezho. Mes Job a skandalas he c'hreg en eur lavaret : « Daoust ha ne ket euz a zaouarn ann Aotrou Doue eo hor boa resevet hor madou? Perag eta ne reseffemp-ni ket ivez, euz he berz, ar poaniou, a blij ganthan da zigass deomp? — Tri euz a vignounet Job a deuas d'he velet; hag ar re-ma a jomas mantret dirag eur stad ken truezus. Ne rent nemet gouela hag hirvoudi. Sperejou berr a dud oant, ha kaout a rea dezho, o va Doue, pa zigassit, henvelep poaniou da eunn den, epad ar vuez-ma, eo abalamour d'he fallagriez. Sonjal a reant eta oa eunn den fall ha difeiz; hag e reant dezhan rebechou. C'huego oa evit Job clevet ar rebechou-ze. Respount a

reas, n'en devoa great fallagriez ebet. Diskleria a rea zoken, gant ann nerzcalon, ha ne vez ket guelet aliez he far : « ha pa deuffe ann Aotrou Doue, emezhan, da lammet diganen va buez, em bezo atao fizians ennhan. Rac, gouzout a rann em euz eur Zalver; hag e savinn adarre euz a varo da veo d'ann deiz diveza euz ar bed. » Eunn dudi eo guelet eunn henvelep couraj, hag eunn henvelep sentidigez.

Gouenn a rann eta diganeoc'h, o va Jesus, ar c'hrass da gendelc'her stard, em speret hag em c'halon, santimanchou a feiz hag a fizians ennhoc'h, evel ann denn santel Job, evit ma vezinn bepred, er iec'hed koulz hag er c'hlenved, er joa koulz hag er boan, a unan ganeoc'h, o va Zalver carantezus, ha ma pokinn d'ho torn trugarezus, neuz forz petra zigassoc'h dinn epad ar vuez-ma. Pedi a rinn breman ar Verc'hez Glorius Vari da gaout ar c'hrass gaer-ze, ann hini gaerra e c'hellomp c'hoantaat var ann douar-ma. En intansion-ze e z'ann da lavaret eunn dizenez euz ar chapeled.

AMAND ENORABL

O va Jesus, ho comzou, enn Aviel, a ro dinn da anaout sclear hag anat emaoch, c'hui ann eil Ferson euz ann Dreindet Sacr en em c'hreat den, e Sacramant ann Aoter, corf, goad, ene ha divinite, cuzet dindan doareou ar bara. Perag oc'h en em lakeat enn eur stad ken dister, c'hui, Crouer ann Env hag ann douar? Ho tiskibl muia caret, sant Yan, hen desk deomp, pa lavar : « O c'honzout e voa deuet ar mare evidoc'h, o va Jesus, da vont daved ho Tad d'ar Barados, hag evit miret ma jomje hoc'h Ebestel, ho pugale, emzivad var ho lerc'h, ho carantez a Zalver a zo eat keit ha ma c'helle mont. » Doue oll galloudec, kavet oc'h euz ann tu, dre eur burzud, da jom gantho er Sacramant Meulet ra vezo. Nann, n'oc'h euz ket dilezet ac'hanomp hon unan en draonien-ma a zaelou. A-ze emaoch,

var ann Aoter, en Tabernacl, prest d'am zicour, da zilaou va fedennou, *adest cunctis obsecrationibus nostris*, ha zoken da vaga va cne paour, poaniet ha dindan ar beac'h. N'euz pobl ebet var ann douar-ma, o va Jesus, pegen galloudus bennac e ve, hag enn deffe ann heur vad da gaout Doue ken tost dezhan, evel m'az'omp-ni kristenien catholic. Al lamp var elum, noz deiz, dirag ann Aoter, a verk dcomp emaoch bepred e tro d'hon digemer, ha da scoazella ac'hanomp. Hag enn despet da eur garantez ker bras, e tilezer ac'hanoc'h! Ne deuer ket d'hoc'h adori, d'ho trugarekaat ha d'ho pedi, pa vez eaz dont! Plijadur eunn tad eo guelet he vugale, bodet enn dro dezhan : hag eur c'hraouadur mad, ne dremenn ket ebiou dorr ti he dad eb mont d'he zaludi. Maget ha savet eo bet ganthan.

C'hui, o va Jesus, a c'hell lavaret comzou ar prophet, o velet eunn niver bras a gristenien, ken dizeblant en ho kenver : « Maget ha savet em euz anezho, ha n'o deuz evidon nemet disprij.

An ejen goulscoude a anavez he ber-  
c'hen, hag ann azen a anavez kraou  
he vestr. *Cognovit bos possessorem suum,  
et asinus præsepe domini sui.* Mes va fobl  
ne anavez ket ac'hanon. N'en deus ket  
a skiant avoalc'h evit comprenn va  
madelez hag ar garantez em euz evin-  
than. • Eo, va Jesus, anaout a rann  
ervad ho carantez evidomp : ha setu  
perag, me garfe o tigoll euz ar ienien  
o deuz lod euz ho pugale evidoc'h.  
Anaout a rann ervad ar brezel fallaer  
ha disleal great d'ho pried, ann Iliz  
catholic. Poania a rinn eta evit skigna,  
etouez ann dud, ann devosion gaer ha  
talvoudee meurbed d'ho Sacramant Meu-  
let ra vezo. Ober a rinn ar pezh a c'hel-  
linn evit alia va zud, va mignounet, ha  
va amezeien da zont d'hoc'h adori cunn  
heur, bep miz, da zul. Pegen eurus e  
vezo ho Calon Sacr o velet, hed an  
deiz, daoulinet, ehars treid ho Taber-  
nacl, kalz a dud euz ar barrez-ma, pep-  
hini d'he dro. E Sacramant aunn Aoter,  
evel guechall er Judee, ne glaskit nemet  
ober vad d'ar re a zeu davedoc'h. Rei

a reoc'h ivez ar pare d'ar re glanv, ar  
guellet d'ar re zall, ar glevet d'ar re  
vouzard. Oll e tistroint d'ar gear, ar  
peoc'h hag ar joa enn ho c'halon.

Goulenn a rann diganeoc'h, o va  
Zalver Jesus, pardoun euz va fec'hejou,  
hag euz ann nebeut a respet em euz  
bet enn hoc'h andret. Ker skanv ounn  
a benn l va speret a ia da c'haloupat  
du-man du-hont, eleac'h sonjal enn ho  
madeleziou. Kaer em euz taoler evez,  
ounn dibarfet em pedennou. N'en em  
glemmann ket ; pell a-ze. Eunn dra vad  
eo dinn kaout bepred va zempladurez  
ha va defaultou dirag va daoulagad. Eaz  
eo dinn neuze kendele'her em c'halon  
santimanchou humbl, hag ivez anaout  
pegement eo red dinn en em harpa  
varnoc'h dre ar beden ha dre ar zacra-  
manchou, dreist oll dre Sacramant  
ann Aoter. Heb sikour ho krass ne  
c'hellann netra, o va Jesus. Grit eta  
ma seveniun ar promessaou em euz great  
deoc'h epad ann heur Adorasion-ma,  
ha ma ne glaskinn e peb tra nemet ho  
polontez santel, hag ho kloar, enn eur

ginnig deoc'h bepred va labouriou, va  
foaniou, kement a rinn, a zonzinn hag  
a livirinn.

Evelse bezet great.

Ra vezo bepred meulet ha trugarekeat  
hor Zalver Jesus-Krist. e Sacramant *ado-  
rabil* ann Aoter. (100 devez induljans.)

(Lavaret, en eur achui ann heur  
Adorasion, pemp *Pater*, pemp *Ave Maria*,  
ha pemp *Gloria Patri* enn intansion  
hon Tad santel ar Pap, evit gounit an  
induljansou.)

Quimper, 16 Janvier 1888.

PERMIS D'IMPRIMER

A. SERRÉ,

Provicair Capitulaire.